

MIZVEZH AR BREZHONEG

Miz Meurzh 2026

MOIS DE LA LANGUE BRETONNE

Mars 2026



VILLE
DE QUIMPER



QUIMPER BRETAGNE
OCCIDENTALE
KEMPER BREIZH IZEL



E MIZ MEURZH E VEZ LAKAET AR BREZHONEG WAR WEL !

Bep bloaz e vez kinniget oberezhioù evit brudañ implij ha deskiñ ar brezhoneg. Brudañ ha diorren ar yezh a zo un engouestl kreñv eus kêr Gemper hag eus Kemper Breizh-Izel. Ur youl kaset dorn ha dorn gant an holl oberourien bublik hag ar c'hevredigezhioù o labourat war dachenn ar yezh.

E-pad « Mizvezh ar brezhoneg » e vez lakaet war wel intrudoù o deus graet berzh dija, gant ar c'hoant ledannat an niver a dud a gemer perzh en darvoudoù-se. Ur mare pinvidik eo ivez evit reiñ lañs da raktresoù nevez a ra gant ar brezhoneg.

PENDANT LE MOIS DE MARS, LE BRETON EST À L'HONNEUR !

Chaque année, les opérations se multiplient pour mettre en valeur l'usage comme l'apprentissage de la langue bretonne. Sa promotion et son développement sont un engagement fort de la ville et de l'agglomération de Quimper, avec la volonté de s'appuyer sur l'ensemble des acteurs publics et associatifs qui agissent en sa faveur.

« Mizvezh ar brezhoneg », le « Mois de la langue bretonne » est l'occasion de mettre en avant des initiatives qui ont déjà fait leur preuve et ne demandent qu'à élargir leur public.

C'est aussi un moment privilégié pour initier de nouveaux projets « gant ar brezhoneg », avec la langue bretonne.



PENDANT LE MOIS DE MARS E MIZ MEURZH

DISKOUEZADEG KIZELLADURIOÙ

Eus al Lun d'ar Gwener
etre 9e ha 12e, hag 1e ha 5e
Kelenn - Kreizenn stummañ Kemper

Kelenn - Diskouezadeg

Diskouezadeg kizelladurioù Drian Bernier e levraoueg Kelenn. Lid digoridigezh an diskouezadeg d'ar 6 a viz Meurzh da 6e noz.

Digoust

Evit kaout ur weladenn heñchet e brezhoneg evit ur strollad, deuit e darempred gant levraoueg Kelenn

☎ 02 98 95 55 99

EXPOSITION DE SCULPTURES


Du lundi au vendredi
de 9h à 12h et de 13h à 17h
Kelenn - Centre de formation Quimper

Kelenn - Exposition

Exposition de sculptures de Drian Bernier à la bibliothèque de Kelenn. Vernissage le 6 mars à 18h.

Gratuit

Pour une visite guidée en breton en groupe, contactez la bibliothèque de Kelenn ☎ 02 98 95 55 99



FEST-NOZ

Sadorn 28 a viz C'hwevrer
8e30 noz - An Athena - An Erge Vras

An Athena - Nozvezh

Gant binvioù divoas e ijin teir vuzisianez DIXIT o stil sonerezh o-unan, o tegas livioù nevez da zañsoù Breizh. Kinnig a raio EBEN un abadenn a-feson hag a-vremañ, « Douar Nevez », o rannañ o sell war sevenadur ha yezh Breizh, hardizh, o krouiñ ha birvidik. Ar strollad HERRIWENN a vesk sonioù a bep mare, gant an delenn getiek istorel, ar c'han hengounel, ar binoù bras, met ivez elektro, o reiñ un tu modern d'ar strollad nerzhus-se.

Priz leun : 8 euro - Priz izel : 5 euro

👉 lathena.bzh

FEST-NOZ

Samedi 28 février
20h30 - L'Athéna - Ergué-Gabéric

L'Athéna - Soirée

À partir d'un ensemble instrumental atypique, les trois musiciennes de DIXIT inventent leur propre langage musical, donnant des couleurs inédites aux répertoires à danser bretons. EBEN présentera un spectacle ambitieux et actuel « Douar Nevez » (Nouvelle Terre) afin de partager leur vision d'une culture et d'une langue bretonne, audacieuse, créative et vivante. Le groupe HERRIWENN mixe des sonorités de toutes les époques, entre la harpe celtique historique, le chant traditionnel, la cornemuse, et l'électro qui ajoute une *vibe* moderne à cet ensemble énergétique.

Tarif plein : 8 euros - Tarif réduit : 5 euros

👉 lathena.bzh

KEMPER E DEK GER BREZHONEK

Sul 1^{añ} a viz Meurzh
Eus 3e da 4e30 goude merenn
Ti ar Glad Kemper

Ti ar Glad - Gweladenn heñchet

Deuit da (ad)ober anaoudegezh gant Kemper dre 10 ger brezhonek : un doare divoutin ha pinvidik da vevañ kêr en ur dañva brezhoneg.

Priz leun : 7 euro - Priz izel : 3 euro

Derc'hel ur plas enlinenn war

👉 quimper.bzh > *Découvrir Quimper*
> *Patrimoines et visites* > *Découvrir Quimper* > *Patrimoines et visites*

QUIMPER EN DIX TERMES BRETONS

Dimanche 1^{er} mars

De 15h à 16h30

Maison du patrimoine Quimper

Maison du patrimoine - Visite guidée

Venez (re)découvrir Quimper à travers dix mots bretons : une manière originale et enrichissante d'appréhender la ville en s'initiant à la langue bretonne.

Plein tarif : 7 euros - Tarif réduit : 3 euros


Réservation en ligne sur

👉 quimper.bzh > *Découvrir Quimper* > *Patrimoines et visites*





© Eric Legret



ANNIE EBREL HA MARIE BERARDY, ESKEMM GANT SONAOZOUREZED

Merc'her 4 a viz Meurzh
Eus 6e30 da 7e30 noz
Mediaoueg Alain Gérard - Kemper

C'hoariva Kerne - Kendiviz

Annie Ebrel hag he nizez Marie Berardy a zo programmet o-div d'an nozvezh *So Breizh !* d'an 20 a viz Meurzh e c'hoariva Kerne. A-raok an abadenn-se e teuint da gontañ deomp er vediaoueg penaos eo bet treuzkaset ar glad komzet, kanet ha sonet kenetrezo hag e kendalc'h hiziv an deiz.

Digoust

ANNIE EBREL ET MARIE BERARDY, PAROLES DE COMPOSITRICES

Mercredi 4 mars
De 18h30 à 19h30
Médiathèque Alain-Gérard - Quimper

Théâtre de Cornouaille - Conférence

Annie Ebrel et sa nièce Marie Berardy sont programmées l'une et l'autre dans le cadre de la soirée *So Breizh !* organisée le 20 mars au théâtre de Cornouaille. Avant cette date, elles viennent raconter à la médiathèque comment la transmission orale et musicale s'est opérée entre elles et se poursuit aujourd'hui.

Gratuit

EMZIFENN EVIT AR MERC'HED E BREZHONEG

Sadorn 7 a viz Meurzh
Eus 2e30 da 5e goude merenn
Ti ar Vro Kemper - Kemper

Ti ar Vro Kemper - Atalier

Ti ar Vro Kemper a ginnig ur staj emzifenn evit ar merc'hed, lukset gant Emilie Vigouroux, bokseur diplomet.

20 euro

 tiarvro-kemper.bzh

SELF DÉFENSE FÉMININ EN BRETON

Samedi 7 mars
De 14h30 à 17h
Ti ar Vro Kemper - Quimper

Ti ar Vro Kemper - Atelier

Ti ar Vro Kemper propose un stage de self-défense pour les femmes, animé par Émilie Vigouroux, boxeuse diplômée.

20 euros

STANDOÙ KELAOUÏÑ : AR BREZHONEG E KEMPER

Sadorn 7 a viz Meurzh
Eus 2e da 6e goude merenn
Kreizenn genwerzh Kerdrezeg
(Carrefour) - Kemper

*Kêr Gemper, Laz-kanañ Luskenn,
Kreizennoù stummañ ha skolioù
divyezheg - Stand*

Standoù kelaouiñ a vo staliet e kreizenn genwerzh Carrefour. Tu vo deoc'h dont da gaozeal brezhoneg ha da sevel ho koulennoù, da destiñ ho anaoudegezhioù war ar yezh ha da c'houzout hiroc'h war an hentennnoù brezhonek e Kemper. Laz-kanañ Luskenn a roio ton d'an abardaez.

Digoust

STANDS D'INFORMATION : LE BRETON À QUIMPER

Samedi 7 mars
De 14h à 18h - Galerie commerciale
de Kerdrezec (Carrefour) - Quimper

*Ville de Quimper, chorale Luskenn &
Centres de formation
et écoles bilingues - Stand*

Des stands d'information éphémères seront installés à la galerie commerciale Carrefour. L'occasion de pratiquer la langue bretonne, de poser ses questions, de tester ses connaissances ou de découvrir les filières de l'enseignement du breton. La chorale Luskenn animera l'après-midi.

Gratuit

KROGAD KEMPER VOLLEY 29 GANT NEPTUNES NAONED

Sadorn 7 a viz Meurzh
8e noz - Kostum Park - À nous la vie
Kemper

*Kemper Volley, gant Kêr Gemper ha
Div Yezh Kemper - Sport*

Na dremenit ket ebioù an derby breizhat, krogad penn uhelañ ar c'hampionad Elite, ha divyezhek penn-da-benn ! Kevredigezh Div Yezh Kemper a vo o terc'hel ur stand evit kinnig an hentenn publik divyezhek, eus ar skol-vamm d'al lise, e Kemper. A-raok ar c'hrogad e vo kinniget d'ar c'hoarierezed ur prantad tañva brezhoneg.

👉 *Bilhedoù : quimper-volley.bzh*

MATCH DU QUIMPER VOLLEY 29 VS NEPTUNES DE NANTES

Samedi 7 mars
20h - Kostum Park - À nous la vie
Quimper

*Quimper Volley, en partenariat avec
la ville de Quimper et Div Yezh
Kemper - Sport*

Ne manquez pas ce derby breton du haut de tableau du championnat Elite entièrement bilingue ! L'association Div Yezh Kemper tiendra notamment un stand pour présenter la filière publique bilingue, du primaire au lycée, sur Quimper. En amont, les joueuses bénéficieront d'une séance d'initiation au breton.

👉 *Billetterie : quimper-volley.bzh*





STROLLAD LENN E BREZHONEG

Merc'her 11 a viz Meurzh

8e noz - Ti ar Vro Kemper - Kemper

Ti ar Vro Kemper - Atelier

Gant "Ar Brad-Kazeg da Varengo", skrivet gant Daniel Doujet.

Digoust

GRUPE DE LECTURE EN BRETON

Mercredi 11 mars

20h - Ti ar Vro Kemper - Quimper

Ti ar Vro Kemper - Atelier

Autour de l'oeuvre "Ar Brad-Kazeg da Varengo" de Daniel Doujet.

Gratuit - tiarvro-kemper.bzh

BABIGED LENNERIEN DIVYEZHKEK

Gwener 13 a viz Meurzh

Eus 9e30 da 10e30 mintin

Mediaoueg Alain Gérard - Kemper

Rouedad mediaouegoù Kemper Breizh-Izel - Lennadenn

Rimadelloù, c'hoarioù bizied ha kontadennoù evit ar vugale vihan e brezhoneg hag e galleg.

Eus 0 da 3 bloaz - **02 98 98 40 81**

BÉBÉS LECTEURS BILINGUES

Vendredi 13 mars

De 9h30 à 10h30

Médiathèque Alain-Gérard - Quimper

Réseau des médiathèques de Quimper Bretagne Occidentale - Lecture

Comptines, jeux de doigts et lectures pour les tout-petits en breton et en français.

De 0 à 3 ans - **02 98 98 40 81**

PRED AR VREZHONEGERIEN

Gwener 13 a viz Meurzh

Kreisteiz - Relais du Nevet Plogoneg

Ti ar Vro Kemper - Pred

Ur pred merenn plijus gant brezhoneg tro-dro d'an daol, digor d'ar vrezhonegerien, nevez pe gozh, ar c'hoant ganto implij ar brezhoneg en o buhez pemdez.

Da baeañ tiarvro-kemper.bzh

REPAS DES BRETONNANTS

Vendredi 13 mars

12h - Relais du Nevet Plogonec

Ti ar Vro Kemper - Repas

Un moment convivial autour d'un bon repas pour des locuteurs confirmés ou en apprentissage de la langue bretonne, et désireux de l'utiliser dans la vie quotidienne.

Payant tiarvro-kemper.bzh





KROGAD MAOUTED KEMPER GANT STADE ROCHELAIS BASKET

Meurzh 17 a viz Meurzh
8e noz Kostum Park - À nous la vie Kemper

Maouted Kemper & BK Keodedour - Sport

Evel bep bloaz e profito c'hoarierien zo eus Maouted Kemper eus un eskemm gant skolioù Diwan Kemper evit deskiñ un nebeut gerioù brezhoneg, gant sikour BK Keodedour, ar font savet evit krouiñ liammoù etre ar c'hlub ha buhez lec'hel Kemper. Ha brezhoneg 'vo klevet e-pad krogad ar Vaouted !

👉 *Bilhedoù : beliersdekemper.bzh*

MATCH DES BÉLIERS DE KEMPER VS STADE ROCHELAIS BASKET

Mardi 17 mars
20h Kostum Park - À nous la vie Quimper

Béliers de Kemper & BK Citoyen - Sport

Comme chaque année, quelques joueurs des Béliers de Kemper profiteront d'un échange avec les écoles Diwan de Quimper pour s'initier au breton, avec le soutien de BK Citoyen, le fonds de dotation qui permet l'implication du club dans la vie locale quimpéroise. Des animations en breton seront également organisées pendant le match des Béliers !

👉 *Billetterie : beliersdekemper.bzh*

KLEW !

Yaou 19 a viz Meurzh
2e30 goude merenn - An Athena An Erge-Vras

An Athena - Abadenn

KLEW ! a zo un arvest seurt ha ne vez ket gwelet bemdez, savet evit lakaat an dud, ar re vras hag ar re vunut, da huñvreal ha da ruzal er jardin kempennet gant ar beder arzourez. Ur jardin lec'h ma tasson yezhoù disheñvel : brezhoneg, galleg, yezh ar sinoù sonet ha dañset, tresadennoù, hag wel rezon, muzik. Gant Yuna Léon (violoñs), Mathilde Chevrel (violoñsel), Thumette Léon pe Lola Volson (kan-sinet), Nolùen Le Buhé (kan). Abadenn evit ar re yaouank.

Priz leun : 8 euro - Priz izel : 5 euro

👉 *lathena.bzh*

KLEW !

Jeudi 19 mars
14h30 - L'Athéna - Ergué-Gabéric

L'Athéna - Spectacle

KLEW ! est un spectacle hors du commun, conçu pour faire rêver et trainer petits et grands dans le jardin entretenu par les quatre artistes. Un jardin où résonnent différentes langues : breton, français, langue des signes chantée et dansée, dessins, et bien sûr, musique. Avec Yuna Léon (violon), Mathilde Chevrel (violoncelle), Thumette Léon ou Lola Volson (chant - chansigne) et Nolùen Le Buhé (chant). Jeune public

Tarif plein : 8 euros - Tarif réduit : 5 euros

👉 *lathena.bzh*





SO BREIZH !

Gwener 20 a viz Meurzh
Adalek 7e noz C'hoariva Kerne
Kemper

C'hoariva Kerne, asambles gant
Gouelioù Meur Kerne - Sonadeg

Evit e seizhvet koulzad e cheñch *So Breizh !*, hep koll ar pezh n'eus lakaet anezhañ d'ober berzh : un aergelc'h gouel ha degemerus. Dre zouster pe gant leun a nerzh, startijenn a chom gant *So Breizh !* : gant e flañchod-dañs savet e-kichen al leurenn vras, hag e zoare dibar da rannañ birvilh krouiñ sonerezh a Vreizh.

Programm an nozvezh sonadegoù :

- 7e noz : **Marie Berardy & Julien Stella**, *Mouezhioù an dud*
- 8e15 noz : **Annie Ebrel – An Ebatoù**, *Fest ha dañsoù & NordestiNoz*

Prizioù ha derc'hel plasoù :

👉 theatre-cornouaille.fr

SO BREIZH !

Vendredi 20 mars
À partir de 19h Théâtre de Cornouaille
Quimper

Théâtre de Cornouaille, en partenariat
avec le Festival de Cornouaille - Concert

Pour sa septième édition, *So Breizh !* évolue et reste fidèle à ce qui fait son succès : l'esprit festif et chaleureux. En douceur ou à plein régime, *So Breizh !* garde son énergie. Avec son parquet de bal installé près de la grande scène, et son aptitude à faire partager autrement la vigueur créatrice des musiques bretonnes.

Au programme de cette soirée de concerts :

- 19h : **Marie Berardy & Julien Stella**, *Mouezhioù an dud – Les Voix des êtres humains*
- 20h15 : **Annie Ebrel – An Ebatoù**, *Fêtes et danses & NordestiNoz*

Tarifs et réservation :

👉 theatre-cornouaille.fr





KAN AR BOBL, KERNE IZEL

Sadorn 21 a viz Meurzh
Adalek 1e30 goude merenn
An Athena - An Erge Vras

*Ti ar Vro Kemper, Diwan Kemper ha
Div Yezh Leston - Abadenn*

Ur c'honkour kan e brezhoneg, muzik ha sevenadur eus ar vro, aozet e pemp korn Breizh hag e lec'h all zoken eo Kan ar Bobl. E gefridi eo reiñ tu d'an holl sonerien, kanerien ha konterien diskouez o ampartiz hag o c'hoant da gemer perzh e buhez sevenadur ar vro. Anavezet eo ouzhpenn evit bezañ ur mare plijus ha laouen hag evit lakaat war-wel, pinvidigezh bras divent danvez Breizh e-keñver muzik ha lennegezh dre gomz.

Digoust

📍 tiarvro-kemper.bzh

KAN AR BOBL, TERRITOIRE SUD CORNOUAILLE

Samedi 21 mars

A partir de 13h30

L'Athéna - Ergué-Gabéric

*Ti ar Vro Kemper, Diwan Kemper et
Div Yezh Leston - Spectacle*

Le Kan ar Bobl est un concours de chant breton, de musique bretonne et de culture bretonne qui se déroule dans les cinq coins de Bretagne et même ailleurs. Ce dernier a pour objectif de permettre à tous les musiciens, chanteurs et conteurs de faire reconnaître leur talent et leur envie de participer à la vie culturelle bretonne. Il est aussi reconnu pour être un moment de convivialité et pour valoriser l'immense richesse du patrimoine oral et musical de Bretagne.

Gratuit

📍 tiarvro-kemper.bzh

TOURNAMANT C'HOARIOÙ EN LINENN

Yaou 26 a viz Meurzh
8e noz - En linenn

Ti ar Vro Kemper - Atalier

Gant Skribbl.io, ur c'hoari tresañ ha divinout liesc'hoarier, ha GeoGuessr, ur c'hoari ma vezer taolet en ul lec'h bennak er bed ha ma ranker kavout e hent.

Digoust

TOURNOI DE JEUX EN LIGNE

Jeudi 26 mars
20h - En ligne

Ti ar Vro Kemper - Atelier

Sur Skribbl.io, jeu de dessin et de devinettes multi-joueurs, et GeoGuessr, jeu dans lequel le joueur est déposé quelque part dans le monde, sa mission consistant à trouver son chemin.

Gratuit

SONADEG LA MEUTE / DUCASSE | BARZHONIEZH GOUEZ / SONEREZH BREIZH A-VREMAÑ

Gwener 27 a viz Meurzh
8e30 noz - L'Athéna, Croas Spenn
Ergué-Gabéric

An Athena - Nozvezh

Kaset gant peder vuzisianez, kanerezed ha sonaozourezed, La Meute a slam, a gan, a huch hag a vouskomz. Ar c'homzoù, komzet ha kanet, a gont prantadoù buhez, skoilhoù, trec'hioù bihan ar vuhez pemdez pe ar c'heleier. Etre sonerezh euredoù ar Balkanoù, sonerezh ar c'hleuboù ha toniaoueg kanerien ha sonerien Breizh-Izel : savet eo muzik Ducasse evit dañsal, evit ober ar fest.

*Priz Leun : 16 euro - Izel : 12 euro
Izel tre : 7 euro*

LA MEUTE / DUCASSE EN CONCERT | POÉSIE SAUVAGE/MUSIQUE ACTUELLE BRETONNE

Vendredi 27 mars
20h30 - L'Athéna - Ergué-Gabéric

L'Athéna - Soirée

Portée par quatre femmes musiciennes, chanteuses et autrices, La Meute slame, chante, crie, chuchote. Les textes, parlés/chantés, racontent des tranches de vie, des déboires, petites victoires du quotidien ou de l'actualité. À mi-chemin entre la musique des mariages balkaniques, celle des clubs occidentaux et le répertoire des chanteurs et sonneurs de Basse-Bretagne, la musique de Ducasse est conçue pour danser, pour faire la fête.

*Tarif plein : 16 euros - Réduit : 12 euros
Très réduit : 7 euros*





BREZHONEG WAR AR MARC'HAD BRAS

Sadorn 28 a viz Meurzh
Eus 10e mintin da 1e goude merenn
Plasenn Médard Kemper

Kêr Gemper & Dizale - Stand

E antre marc'had ar stêr Deir e vo kinniget gant ar studio kemperad Dizale e labour gant tañvadennoù filmoù ha tresadennoù-bev bet advouezhiet nevez 'zo, hag a c'heller adkavout war al lec'hienn kleweled.bzh. Deskiñ un nebeut gerioù brezhoneg 'vo tu ober ivez gant brezhonegerien nevez desket ar yezh ganto. Ha marteze 'vo tu deoc'h pakout ur banne kafe ma vez goulennet e brezhoneg ganeoc'h ? Un doare da (ad) stagañ ganti !

Digoust

DU BRETON AU GRAND MARCHÉ

Samedi 28 mars
De 10h à 13h - Place Médard Quimper

Ville de Quimper & Dizale - Stand

À l'entrée du marché du Steïr, le studio quimpérois Dizale présentera le fruit de son travail avec une sélection de films et dessins animés récemment doublés en breton, disponibles sur la plateforme kleweled.bzh. Vous pourrez aussi apprendre quelques mots de breton avec de nouveaux locuteurs. Et qui sait, peut-être oserez-vous vous initier au breton en demandant un café : l'occasion de mettre le pied à l'étrier !

Gratuit

STAJ EVIT AR GERENT « BREZHONEG ER GÊR »

Sadorn 28 a viz Meurzh
Eus 9e30 da 5e
Ti ar Vro Kemper - Kemper

Ti ar Vro Kemper / Atalier

Dont a ra ho pugale eus ar skol gant gerioù nevez e brezhoneg ? Ti ar Vro a ginnig deoc'h un devezh evit kregiñ gant ar yezh d'ho tro, live 1, deraouidi.

30 euro

 tiarvro-kemper.bzh

STAGE POUR LES PARENTS « DU BRETON À LA MAISON »

Samedi 28 mars
De 9h30 à 17h
Ti ar Vro Kemper - Quimper

Ti ar Vro Kemper - Atelier

Vos enfants reviennent de l'école avec de nouveaux mots en breton ? Ti ar Vro vous propose une journée pour, à votre tour, commencer l'apprentissage de la langue, niveau 1, débutants.

30 euros

 tiarvro-kemper.bzh





EMGAVIOÙ AN NIVEREL : KENTELIG BREZHONEG ENLINENN

Lun 30 a viz Meurzh

Eus 4e da 5e goude-merenn - Enlinenn

Kêr Gemper - Atelier

Kinnig a ra servijoù niverel kêr Gemper d'e implijerien hag implijerezed ur prantad tañva brezhoneg enlinenn dre bellemvod. Un digarez da zeskiñ un nebeut gerioù brezhoneg o vestroniañ an ostilhoù pellemvod : rannañ ar skramm, mikro, kamera, chat...

Digoust

RENDEZ-VOUS DU NUMÉRIQUE : PETIT COURS DE BRETON EN VISIO

Lundi 30 mars

De 16h à 17h - En ligne

Ville de Quimper - Atelier

Le service numérique de la ville de Quimper propose à ses usagers et usagères, une séance d'initiation au breton en ligne, par visio. L'occasion d'apprendre quelques mots de breton tout en maîtrisant les outils de visio conférence : partage d'écran, micro, caméra, chat, etc.

Gratuit





BREZHONEG EN DAVARNIOÙ & KAFETIOÙ !

Saludiñ, goulenn ur banne kafe, paeañ... grit e brezhoneg ! Savet ez eus bet gant kêr Gemper ur roll-meuzioù ha banneoù, hag a servijo deoc'h a c'heriaoueg en degad a davarnioù ha kafetioù o kemer perzh.

Listenn ar stalioù da gavout war [📍 quimper.bzh](https://quimper.bzh)

DU BRETON DANS LES BARS ET LES CAFÉS !

Dire bonjour, commander un café, demander l'addition... dites-le en breton ! La ville de Quimper a réalisé une plaquette-menu qui vous servira de glossaire dans une dizaine de bars participants.

La liste de ces adresses est à retrouver sur [📍 quimper.bzh](https://quimper.bzh)



Avec 9,2 % d'élèves bilingues en primaire en 2024, Quimper affiche le taux le plus élevé parmi les dix plus grandes villes de Bretagne. En volume, la ville se classe au troisième rang régional, derrière Rennes et Brest, avec 755 élèves scolarisés dans les filières bilingues.

Ces résultats laissent entrevoir un potentiel de développement : selon l'enquête TMO-Régions 2024, 78 % des personnes interrogées dans le Finistère se déclarent favorables à un renforcement de l'enseignement du breton à l'école.

Gant 9,2 % eus skolidi ar c'hentañ derez enskrivet e skolioù divyezhek e 2024, emañ Kemper gant ar feur uhelañ e-touez dek kêr vrasañ Breizh. Hag en trede renk rannvroel emañ ar gêr, a-dreñv Roazhon ha Brest, ma sellec'h eus an niver a vugale skoliatet : 755 bugel en hentadoù divyezhek.

Kalonekaüs eo an disoc'hoù-se. Hervez sondadeg TMO-Rannvroioù 2024 e sav 78 % eus an dud aterset e Penn-ar-Bed a-du gant kreñvaat ar c'helenn brezhoneg er skolioù.

ÉCOLES ET FILIÈRES BILINGUES SKOLIOÙ HAG HENTADOÙ DIVYEZHEK

- **Ville de Quimper & Div Yezh Kemper**
Samedi 7 mars

École Edmond-Michelet / 10h > 12h

- **Samedi 28 mars**

École Jacques-Prévert / 10h > 12h

École Yves-Le-Manhec / 10h > 12h

- **Enseignement catholique**

- **Samedi 21 mars / 9h30 > 12h**

École Sainte-Marie-Saint-Joseph,
Ergué-Gabéric

École Saint-Egonnec, Plogonnec

École Saint-Charles-Saint-Raphaël,
Quimper

- **Écoles Diwan de Kerfeunteun,**

Creac'h Gwenn et Penhars, Quimper

Vendredi 27 mars / 15h > 18h

Samedi 28 mars / 10h > 12h

- **Kêr Gemper & Div Yezh Kemper**
Sadorn 7 a viz Meurzh

Skol Edmond Michelet / 10e > 12e

- **Sadorn 28 a viz Meurzh**

Skol Jacques Prévert / 10e > 12e

Skol Yves Le Manhec / 10e > 12e

- **Kelenn katolik**

- **Sadorn 21 a viz Meurzh / 9e30 > kreisteiz**

Skol Santez-Vari-Sant-Josef,
An Erge Vras

Skol Sant-Egoneg, Plogoneg

Skol Sant-Charlez-Sant-Rafael,
Kemper

- **Skolioù Diwan Kerfeunteun,**

Krec'h Gwenn ha Penharz, Kemper

Gwener 27 a viz Meurzh / 3e > 6e noz

Sadorn 28 a viz Meurzh / 10e > 12e

- **Mervent**

Mercredi 4 mars à l'UBO,
Pôle universitaire Pierre-Jakez-
Helias, Quimper / 14h > 18h

- **Kelenn**

Samedi 7 mars 3 rue de la Vendée,
Quimper / 9h30 > 12h30

- **Mervent**

Merc'her 4 a viz Meurzh
en UBO, Skol-veur Pêr-Kakez Helias,
Kemper / 3e > 6e goude merenn

- **Kelenn**

Sadorn 7 a viz Meurzh
3 straed ar Vañde, Kemper / 9e30 > kreisteiz hanter

MIZVEZH AR BREZHONEG

Miz Meurzh 2026

MOIS DE LA LANGUE BRETONNE

Mars 2026

Darvoudoù all a c'hallfe
bezañ ouzhpennet
d'ar programm.

Evit kaout tout an
darvoudoù, kit war

D'autres événements
pourront être ajoutés
à ce programme.

Pour connaître l'intégralité
des actions, rendez-vous sur

👉 [QUIMPER.BZH](https://www.quimper.bzh)

👉 [QBO.BZH](https://www.qbo.bzh)



VILLE
DE QUIMPER



QUIMPER BRETAGNE
OCCIDENTALE
KEMPER BREIZH IZEL

